

An imposupoù – Les impossibles (4)

Yvonne DETENTE / GARLAN – Ar Vinic’hi, miz Kerdu 1979 (Minihy-Tréguier, Décembre 1979)

Mar plij ganeoc’h e selaoufet
Ur son a-nevez gompozet.

*Gen-e-gen , gen-e-gen
Gen gen gen , gen-e-gen*

Ma zo e-barzh ur ger gwirionez
On kontant da goll ma buhez.

Disul ar beure pa savis
Is da c’housperoù en em hiviz.

e-barzh ar gêr pan on arriet
On kaset d’an aod da arat.

Lakaen ma c’hezeg en em godelloù
Ha war ma chouk ma c’hilhorioù

e-barzh an aod pan on arriet
Ur gozh wrac’h vil ’m eus rankontret.

Hag a lere ar gozh wrac’h-se din :
«Kez-te da dilojañ ma brini !»

A dapen ac’hane ur maen gwenn
Hag e ren dezhi un taol voundenn.

A dapen anezhi e-barzh korn he zal
Hag a blesan dezhi kof he gar.

Me ’m boa gwelet un onner vloaz
O tougañ an tu all war he skoaz.

Me am boa gwelet ur gozh gazeg
Kriblet he fenn e-barzh ul lanneg.

Me am boa gwelet ur c’hefeleg
O plantañ fav e-barzh ur garreg

Hag ur c’hozh varc’h o lac’hañ laou !
Ma disvankit ma lâran gaou !

*Si cela vous plait vous écouterez
Une chanson composée récemment.*

*Gen-e-gen , gen-e-gen
Gen gen gen , gen-e-gen*

*Si elle contient un mot de vérité
Je suis content de perdre la vie.*

*Dimanche matin en me levant
J’allai aux vêpres en chemise.*

*En arrivant à la maison
On m’envoya charruer à la grève.*

*Je mis mes chevaux dans mes poches
Et l’avant train de charrue sur mon dos.*

*Quand je suis arrivé à la grève,
J’ai rencontré une vieille bonne femme moche.*

*Et la vieille sorcière me disait :
«Vas donc déloger mes corbeaux !»*

*J’attrapai une pierre blanche par là
Et lui envoyai un coup de motte.*

*Je l’atteinds au coin du front
Et lui blessai le mollet.*

*J’ai vu une génisse d’un an
Porter l’autre côté sur ses épaules.*

*J’ai vu une vieille jument
Peigner sa tête dans une lande.*

*J’ai vu une bécasse
Planter des fèves dans un rocher,*

*Et un vieux cheval tuer des poux !
Corrigez-moi si je raconte des mensonges !*